

FRAJILITÉ AN DUD IAOUANK

(War eun ton rigolo)

Ni boa eur c'hogik iaouank oa du-man genem-ni
Oa kommanset da gana, mes brema na ra mui.
Eun nozvez goude e goan, o tont eur zonz 'n e ben :
Me a renk mont en noz-man, var digare pourmen.

Me renk ober eur bale, eun droyat var ar mez,
Da glask he merc'h Perina digant an intanvez.
Peguir on hanvet kogik gant holl dud ar vro-ma,
Me garfe kaout eur bolez 'vit 'n em zivertissa...

Pa 'm eus tapet an hano a gogik 'vit partaj,
Vo red d'in kaouet parrez da gomans ma menaj,
Perin, merc'h an intanvez hounez a zo d'am grad :
Kanerez ha danserez, brillant he daou lagad.

Bonsoir d'ec'h-hu, intanvez, setu me deut exprez
Da glask ho merc'h Perina da hanter tiegez.
Rag keit ha ma vemp iaouank, or bo kontantamant
Ha plijadur assamblez hep chagrin na tourmant.

Ma merc'h-me zo abredik eur blavez c'hoaz :
Mar de kontant ar buguel, me na ran ket a gaz.
Kousket eo en he guele er pen draon an ti,
Monet a ran d'he c'havet, da c'houlén diganti.

Arsa, ma merc'h, emezi, na d'in-me leveret
Ha c'houi zo kontant, paourik, de gevet eur pried.
Berroc'h kavfet an amzer breman epad an anv
Ha tom a doc'h ho kuele, goude pa zeui ar goanv.

O ia va mam, emezi, serten me zo kontant
Demeus a greiz ma c'halon da gaout eur pod iaouank.
Mar de kaner ha danser hag eur pod dilikat,
Neuze am eus esperanz d'ober tiegez mad.

Neuze ar pod iaouank-man a zo joaüs ha gie
Hag a zistroas d'ar ger, hed an end 'n eur gane.
Penez eta, Yan Gogik, te zo bet o vale.
Eun tam mout divezat o c'hanons d'omp an de.

Neuze zistroat ouzln gant eun air da c'hoarzin :
Mar de guir on me kogik, c'houi zo eur louarn fin.
C'houi pefe eur vadelez da vont breman raktal
Da anons ma dimezi betek ar presbital.

Ar c'hoarz var ma muzellou, pa n'on ket vit miret :
Ia va mignon, emezan, me rei ze, na re ket ;
Monet a ran evidoc'h beteg ar presbital
Rag merc'h an intanvez evidoc'h né ket fal.

Bonjour d'oc'h, o trou person, me a zo deut gant prez
Da c'hout ha c'houi zimefe eur c'hog hag eur bolez
Pere o deus dezir bras da veat uniset ;
Eun tamic a zo dija o deus en em choazet.

Neuze a respontas d'in ive 'n eur vouze'hoarzin :
Deuz aman abarz zal, kemer eur bane guin.
Eroët e zout bepred, eun tamik de kevier,
A teus klevet jamez ve dimezet ar yer.

Ezkuzit, aotrou person, mar meus drouk parlantet :
Malheur eo d'an dud iaouank, pere zo lezhanvet.
Ar re a barlanton d'oc'h a zo daou zen iaouank
A zezir be unisset vel diou galon gontant.

Ar re a barlanton d'oc'h zo mal ha fumelen
A zezir bea staget gant ar memez chaden.
Unan ane trivec'h vla, an hini all pemzek
Zo pell zo braz an hirvoud, c'hortoz be dimezet

Ma et d'ar guer ma mignon, lar d'e dont d'an illiz
Ha me ho interrojo var dern ar c'hatekis
Pa er goulet digante, a na ouient netra
Demeus ar sakramanchou, ar re brinsipalla.

Filet d'ar guer bugale, evit eur bloa pe daou
Da c'hortoz ma po desket dern ar zakramanchou.
Neuze zavas e ziou skoa, me a gred a zonzje
An druez eo emezan, dimezi bugale.

Neuze a zeuont d'ar guer, o daou en eur ouela,
Red ha vo d'eomp emezo, donet da studia,
Red ha vo d'eomp studia, koulz an de hag an noz,
Ma nouzomp ket re nevez, ni zisko ar re goz.

Tri pe bevar miz goude a ia an intanvez
Da gaout an aotrou person da lard d'an tol evez
Rag va merc'h zo languissant, eun tammik zo dija
Sul vui avans he c'hlevet ia bepred war velad.

Setu an aotrou person, d'ezi neus lavaret :
Lavarit d'ezo dont c'hoas hag a vont dimezet.
C'houi ha vad daou zen iaouank, a lavar ar person,
Oa neum gonvervissa eb mont d'ar mision.

Ar memez tra ez in bed dimezet hag eureujet,
Gras da vea evruz keit a vont var ar bed,
Bonheur a zeziromp d'e keit a vont er bed-ma
Ha goude pa vont maro, er gloar da jouissa.

FIN

Corentin BUARD.

Tous droits réservés :

Nicolas ROUZAUT.